

KENTELIOÙ BREZHONEG

War ar Radio

Sizhun IV

SIZHUN IV

KENTEL 1

E PELEC'H EMAÑ FRIDU ?

A = Animatour

M = Maela

R = Riwall

A - Demat deoc'h-holl !
Emaomp gant Riwall ha Maela evit ur c'hoari nevez :
"Pelec'h emañ Fridu?"
Demat Riwall, demat Maela !

R/M - Demat !

A - Prest oc'h ?

R/M - Ya, prest omp !

A - Selaou Riwall !
(WAOU WAOU + TROUZ FOAR AL LOENED)
E pelec'h emañ Fridu ?

R - **E foar al loened emañ !**

A - Mat-tre, e foar al loened emañ Fridu.
Ur poent evit Riwall.
Maela bremañ, selaou mat !
(WAOU WAOU + TROUZ AR SIRK)
E pelec'h emañ Fridu ?

M - Er sirk emañ !

A - Mat-tre, ya, er sirk emañ Fridu.
Ur poent evit Maela ivez.
Riwall bremañ.
(WAOU WAOU + TROUZ AN DOUR ER GIBELL)
E pelec'h emañ Fridu ?

R - War-vord ar mor emañ !

A - A ! **N'emañ ket !**
Er gibell emañ !
Netra evit Riwall.
Tro Maela bremañ da c'hoari.
Selaou Maela !
(WAOU WAOU + TROUZ AR FEST-NOZ)
E pelec'h emañ Fridu ?

M - Er fest-noz emañ !

A - Ya, er fest-noz emañ.
Ur poent all evit Maela.
Riwall bremañ, selaou mat !

(WAOU WAOU + TROUZ AN TREN)
E pelec'h emañ Fridu ?

R - E-barzh an tren emañ !

A - Mat-tre !
Ya, e-barzh an tren emañ Fridu.
Maela, prest out ?
Selaou mat !
(WAOU WAOU + TROUZ AR PORZH-MOR)
E pelec'h emañ Fridu ?

M - E-barzh an aerborzh emañ ?

A - N'emañ ket, er porzh-mor emañ !
Poent ebet evit Maela.
Riwall bremañ, selaou !
(WAOU WAOU + TROUZ AN OFERENN)
E pelec'h emañ Fridu ?

R - Er skol emañ !

A - N'emañ ket, en oferenn emañ !
Netra evit Riwall.
Tro Maela da c'hoari.
Selaou !
(WAOU WAOU + TROUZ AR SINEMA)
E pelec'h emañ Fridu ?

M - Er sinema emañ !

A - Mat-tre Maela.
Er sinema emañ Fridu !
Echu eo evit hiziv !
Daou boent evit Maela ha tri foent evit Riwall.
A-benn arc'hoazh evit ur c'hoari all gant Riwall ha Maela !
Kenavo !

GERIAOUEG

fest^o-noz , ar f. -où-n. <i>fest-noz</i>	war-vord au bord ,
foar^o , ar f. -ioù <i>foire</i>	<i>sur le bord</i>
kibell^o , ar g. -où <i>baignoire</i>	
oferenn^o , an o. -où <i>messe</i>	emañ est, se trouve

aerborzh, an a. -ioù *aéroport*
porzh-mor, ar p. -ioù-m.
port de mer
sinema, ar s. -ioù *cinéma*
siirk, ar s. -où *cirque*

foar al loened la foire aux animaux

SIZHUN IV

KENTEL 2

C'HOARI WAR AR C'HEOGRAFIEZH PESEURT KÊR EO?

A - Demat deoc'h-holl !
Setu emamp c'hoazh gant Riwall ha Maela !
Daou boent a zo dija gant Riwall ha tri foent gant Maela.
Ur c'hoari all hiziv : Peseurt kêr eo ?
Prest oc'h da c'hoari ?

R/M - Ya, prest omp !

A - Selaou Maela !
Bras eo ar gêr-mañ.
E Bro-Leon emañ.
War-vord ar mor emañ.
E Gwipavaz emañ aerborzh ar gêr-mañ.
Peseurt kêr eo ?

M - Brest eo !

A - Ya, Brest eo, mat-tre.
Riwall bremañ !
E Bro-Dreger emañ.
Etre Montroulez ha Sant Brieg emañ.
N'emañ ket pell diouzh Menez Bre.
War an hent bras emañ.
Peseurt kêr eo ?

R - Gwengamp eo !

A - Mat-tre Riwall, ya, Gwengamp eo.
Tro Maela bremañ, selaou !
E Penn ar Bed emañ.
War-vord ar Stêr-Aon emañ.
E-kichen Pleiben emañ.
N'emañ ket pell diouzh ar Menez C'homm.
Peseurt kêr eo ?

M - Douarnenez eo !

A - N'eo ket, Douarnenez n'emañ ket war-vord ar Stêr-Aon, Kastellin eo !
Poent ebet evit Maela.
Riwall bremañ, selaou !
E Bro-Leon emañ.
E Bro an artichaod emañ.
War-vord ar mor emañ.
Er gêr-se emañ ar B.A.I.
N'emañ ket pell Enez-Vazh diouzh ar gêr-se.
Peseurt kêr eo ?

R - Rosko eo !

- A - Mat-tre Riwall, ur poent all evit Riwall.
Maela bremañ selaou !
E Bro-Wened emañ.
Bras eo ar gêr-se.
Ur porzh-pesketa a zo er gêr-se.
Ur porzh-brezel a zo ivez er gêr-se.
Etre Kemper ha Gwened emañ.
Peseurt kêr eo ?
- M - An Oriant eo !
- A - Mat-tre maela, ur poent evit Maela.
Tro Riwall da c'hoari, selaou !
E Breizh-Uhel emañ.
Ur gêr vras eo.
Er gêr-se emañ Parlamant kozh Breizh.
War-vord ar Stêr-Wilun emañ.
Peseurt kêr eo ?
- R - Roazhon eo !
- A - Mat-tre Riwall !
Setu echu evit hiziv !
Pemp poent a zo bremañ gant Maela ha pemp poent evit Riwall.
Kenavo a-benn arc'hoazh !

GERIAOUEG

artichaod, an a. (s. -enn*, an a.) <i>artichaut</i>	An Oriant <i>L'Orient</i>	pesketa peskataet	diouzh de
geografiezh*, ar c'h. -où <i>géographie</i>	Ar Stêr-Aon <i>L'Aulne</i>	<i>pêcher</i>	
stêr*, ar s. -ioù <i>rivière</i>	Ar Stêr-Wilun <i>La Vilaine</i>		pell loin
parlamant, ar p. -où <i>parlement</i>	Breizh <i>Bretagne</i>		
porzh-brezel, ar p. -ioù-b. <i>port de guerre</i>	Breizh-Uhel <i>Haute-Bretagne</i>		
porzh-pesketa, ar p. -ioù-p. <i>port de pêche</i>	Enez-Vazh <i>île de Batz</i>		
	Gwened <i>Vannes</i>		
	Gwengamp <i>Guingamp</i>		
	Gwipavaz <i>Guipavas</i>		
	Kastellin <i>Châteaulin</i>		
	Kemper <i>Quimper</i>		
	Menez-Bre <i>Méné Bré</i>		
	Menez-C'homm <i>Menez Hom</i>		
	Montroulez <i>Morlaix</i>		
	Penn ar Bed <i>Finistère</i>		
	Pleiben <i>Pleyben</i>		
	Roazhon <i>Rennes</i>		
	Rosko <i>Roscoff</i>		
	Sant-Brieg <i>Saint-Brieuc</i>		

Brasañ porzh-pesketa a zo e Breizh *Le plus grand port de pêche de Bretagne*
N'emañ ket pell diouzh Menez Bre *Ce n'est as loin du Méné Bré*
Bro an artichaod *Le pays des artichauts*
War-vord ar mor *Au bord de la mer*
An hent bras *La grande route*

SIZHUN IV

KENTEL 3

C'HOARI WAR AL LEC'HIOU BRUDET E BREIZH

- A - Demat deoc'h-holl !
Hiziv emomp gant Riwall ha Maela adarre evit ur c'hoari all :
"Lec'hioù brudet Breizh".
Demat Maela ha Riwall, prest oc'h ?
- WR - Ya, prest omp !
- A - Maela, e pelec'h emañ Kastell Duked Breizh ?
- M - E Naoned emañ !
- A - Mat-tre, ur poent.
Riwall, e pelec'h emañ Kamp Artuz ?
- R - E Karaez emañ !
- A - N'emañ ket !
En Uhelgoad emañ Kamp Artuz !
Poent ebet evit Riwall.
Maela, e pelec'h emañ Parkad Meinhir ar Vêneg ?
- M - E Karnag emañ !
- A - Mat-tre !
Ur poent all evit Maela.
Riwall, e pelec'h emañ Iliz-Veur Sant Tudal ?
- R - E Landreger emañ ?
- A - Ya, e Landreger emañ;
Ur poent evit Riwall.
Maela, e pelec'h emañ Karreg an Tan ?
- M - E Brasparzh emañ !
- A - N'emañ ket !
E Gouezeg emañ !
Poent ebet evit Maela.
Riwall, e pelec'h emañ Tour-Tan Eckmuhl ?
- R - E Penmarc'h emañ !
- A - Ya, e Penmarc'h emañ, ur poent all evit Riwall.
Maela, e pelec'h emañ Liorzh an Thabor ?
- M - E Kemper emañ !
- A - N'emañ ket !
E Roazhon emañ.
Poent ebet.
Riwall, e pelec'h emañ ar "Radom" ?
- R - E Pleuveur-Bodou emañ !

- A - Ya, e Pleuveur-Bodou **emañ**.
Ur poent.
Maela, e pelec'h **emañ** Chapel ar C'hreizkêr ?
- M - Er Folgoad **emañ** !
- A - **N'emañ ket** !
E Kastell-Paol **emañ**.
Poent ebet evit Maela.
Riwall, e pelec'h **emañ** Pont Albert Louppe ?
- R - E Plougastell **emañ** !
- A - Mat-tre, ya, e Plougastell **emañ** !
Ur poent all evit Riwall.
Maela, e pelec'h **emañ** Chapel Tremalo ?
- M - E Pont Aven **emañ** !
- A - Mat-tre Maela, ur poent evit Maela ivez !
Riwall, e pelec'h **emañ** Iliz-Veur Sant Kaourintin ?
- R - E Kemper **emañ** !
- A - Ya, e Kemper **emañ**.
Ur poent !
Maela, e pelec'h **emañ** Beg ar Raz ?
- M - E Gwaien **emañ** !
- A - **N'emañ ket** !
E Plogoñv **emañ**.
Poent ebet.
Riwall, e pelec'h **emañ** Kastell an Tarv ?
- R - E Karanteg **emañ** !
- A - Mat-tre Riwall hag ur poent all evit Riwall.
Setu echu evit hiziv !
Eizh poent a zo gant Maela hag unnek a zo gant Riwall !
Kenavo a-benn arc'hoazh !

GERIAOUEG

chapel* , ar ch. -ioù <i>chapelle</i>	An Uhelgoad <i>Le Huelgoat</i>	brudet renommé,
iliz*-veur , an i. -où-m.	Ar Folgoad <i>Le Folgoët</i>	connu
<i>cathédrale</i>	Beg ar Raz <i>La Pointe du Raz</i>	
karreg* , ar g. <i>kerreg rocher,</i>	Brasparzh <i>Brasparts</i>	
<i>récif</i>	Gouezeg <i>Gouezec</i>	
	Gwalen <i>Audierne</i>	
dug , an d. -ed <i>duc</i>	Karaez <i>Carhaix</i>	
kamp , ar c'h. <i>où camp</i>	Karanteg <i>Carantec</i>	
kastell , ar c'h. <i>kestell château</i>	Karnag <i>Carnac</i>	
kreiz-kêr , ar c'h. <i>centre ville</i>	Kastell-Paol <i>Saint-Pol-de-Léon</i>	
lec'h , al l. -ioù <i>lieu</i>	Landreger <i>Tréguier</i>	
maen-hir , ar m. <i>mein-h.</i>	Naoned <i>Nantes</i>	
<i>menhir</i>	Penmarc'h <i>Penmarch</i>	
parkad , ar p. -où <i>contenu d'un</i>	Pleuveur-Bodou	
<i>champ</i>	<i>Ploumeur-Bodou</i>	
pont , ar p. -où <i>pont</i>	Plogoñv <i>Plogoff</i>	
tarv , an t. <i>tirvi taureau</i>		

Artus *Arthur*
Sant Kaourintin
Saint Corentin
Sant Tudal *Saint Tugdual*

Kastell Duked Breizh *Le Château des Ducs de Bretagne*
Liorzh an Thabor *Le jardin du Thabor*

SIZHUN IV

KENTEL 4

GANT PIV EMAÑ "BISIG" AR C'HAZH ?

- A - Salud d'an holl, **emaomp** c'hoazh gant Maela ha Riwall evit ur c'hoari all :
"Gant piv emañ Bisig ar c'hazh ?"
Salud Riwall ha Maela, prest oc'h da c'hoari ?
- RM - Ya, ya, prest omp !
- A - Selaou Maela !
(ALPHONSE ARZEL + MIAOU MIAOU)
Gant piv emañ Bisig ?
- M - Gant Alphonse Arzel emañ !
- A - Ya, gant Alphonse Arzel emañ !
Ur poent evit Maela.
Selaou Riwall !
(CHARLEZ VRAS + MIAOU MIAOU)
Gant piv emañ Bisig ?
- R - Gant Charlez Vras emañ !
- A - Mat-tre, gant Charlez Vras emañ !
Ur poent ivez evit Riwall.
Selaou Maela !
(MOUEZH RONAN PENSEC + MIAOU MIAOU)
Gant piv emañ Bisig ?
- M - Gant Stephanie De Monaco emañ !
- A - C'ha, c'ha, c'ha !
N'emañ ket !
Gant Ronan Pensec emañ !
Poent ebet evit Maela.
Selaou Riwall !
Bezomp sirius !
(MOUEZH ALAN STIVELL + MIAOU MIAOU)
Gant piv emañ Bisig ?
- R - Gant Jil Servat emañ !
- A - **N'emañ ket !**
Gant Alan Stivell emañ !
Netra evit Riwall.
Tro Maela bremañ, selaou !
(MOUEZH NAIG ROZMOR + MIAOU MIAOU)
Gant piv emañ ?
- M - Gant Naig Rozmor emañ !
- A - Mat-tre Maela !
Ur poent all.

- Selaou Riwall !
(MOUEZH YOUENN GWERNIG + MIAOU MIAOU)
Gant piv emañ Bisig ?
- R - Gant Youenn Gwernig emañ !
- A - Ya, gant Youenn Gwernig emañ !
Ur poent ivez evit Riwall.
Selaou Maela !
(MOUEZH PER JAKEZ HELIAS + MIAOU MIAOU)
Gant piv emañ ar c'hazh ?
- M - Gant Glenmor emañ !
- A - **A ! N'emañ ket !**
Gant Per Jakez Helias emañ !
Poent ebet evit Maela.
Selaou Riwall !
(MOUEZH GOULC'HAN KERVELLA + MIAOU MIAOU)
Gant piv emañ Bisig ?
- R - Gant Goulc'han Kervella emañ !
- A - Mat-tre Riwall, gant Goulc'han Kervella emañ.
Setu echu ar c'hoari ganeomp !
Daou boent evit Maela.
Tri foent evit Riwall.
Aet ar maout gant Riwall !
Kenavo deoc'h tout !

GERIAOUEG

salud, ar s. -où salut

ganeomp avec nous

Bezomp sirius ! Soyons sérieux !

Kenavo deoc'h-tout Au revoir à tous

Gant piv emañ Bisig ar c'hazh Avec qui se trouve le chat Bisig

SIZHUN IV
KENTEL 5
UR RIMADELL HIZIV
"PERAK EO DU DA C'HENOÙ ?"

Lavar din rozenn, perak eo du da c'henoù ?

Gant ar mouar eo du !

E pelec'h emañ ar mouar ?

War an drez emañ ar mouar !

E pelec'h emañ an drez ?

War ar c'hleuz emañ an drez !

E pelec'h emañ ar c'hleuz ?

War ar menez emañ ar c'hleuz !

E pelec'h emañ ar menez ?

Dindan an erc'h emañ ar menez !

E pelec'h emañ an erc'h ?

Teuzet eo an erc'h gant an heol !

E pelec'h emañ an heol ?

E-barzh ar mor da guzhat.

Mar ne gredit ket, kit da welet !

GERIAOUEG

drez, an d. (s. -enn^o, an d.)

ronces

mouar, ar m. (s. -enn^o, ar v.)

mûres

erc'h, an e. *neige*

heol, an h. -loù *soleil*

kleuz, ar c'h. -loù *ensemble*

du fossé et du talus

Rozenn prénom féminin

kuzhat kuzhet

(se) cacher

teuziñ teuzet *fondre*

Da c'henoù Ta bouche

Lavar din Dis moi

Mar ne gredit ket, kit da welet !

Si vous ne me croyez pas, allez-y voir par vous-même !

Teuzet eo C'est fondu; il a fondu

perak *pourquoi*

1 - AR VERB BEZAÑ/LE VERBE ETRE - EMAÑ -

Emañ est une forme S3 du verbe être/bezañ tout comme **eo** et **a zo**.

Emañ indique une localisation, une situation.

Emañ ne peut jamais être précédé du sujet.

Ex : **Er fest-noz emañ Fridu.** *Fridu est (se trouve) au fest-noz.*

Er skol emañ Fridu. *Fridu est (se trouve) à l'école.*

Emañ peut être placé en tête de phrase.

Ex : **Emañ Fridu er gêr.** *Fridu est à la maison.*

La forme négative d'**emañ** se construit comme pour **eo**

Ex : **Er skol emañ Fridu.** *Fridu est à l'école.*

N'emañ ket Fridu er skol. *Fridu n'est pas (ne se trouve pas) à l'école.*

2 - AR GERIOU GOULENN/LES MOTS INTERROGATIFS

A - Pelec'h ?

Pelec'h ? interroge sur le lieu.

Ex : **Pelec'h emañ Fridu ?** *Où est (ou se trouve) Fridu ?*

B - Piv ?

Piv ? interroge sur la personne.

Ex : **Piv eo ?** *Qui est-ce ?*

Gant piv emañ Blisig ? *Avec qui est (se trouve) Blisig ?*

C - Perak ?

Perak ? interroge sur la cause.

Ex : **Perak eo du 'da c'henoù ?** *Pourquoi ta bouche est-elle noire ?*

D - Peseurt ?

Peseurt ? signifie lequel, laquelle, lesquelles ou lesquels.

Ex : **Peseurt kêr eo ?** *Quelle ville est-ce ?*

3 - AR RESPONT D'AR GOULENN/LA REPONSE A LA QUESTION

Notez bien qu'en breton la réponse à une question se fait toujours en utilisant la même structure grammaticale que celle employée dans la question.

Ex :	E pelec'h Er sirk	emañ emañ	Fridu Fridu	? .	<i>Ou se trouve Fridu ? Il est au cirque.</i>
	Peseurt kêr Brest	eo eo		? .	<i>Quelle ville est-ce ? C'est Brest.</i>
	Gant plv Gant Servat	emañ emañ	Bisig Bisig	? .	<i>Avec qui se trouve Bisig ? Bisig est avec Gilles Servat.</i>

4 - AN DISKOUENZAÑ/LE DEMONSTRATIF

L'adjectif démonstratif *ce, cette, ces* se rend au moyen de l'article défini et des particules invariables *-mañ, -se* et *-hont* placées derrière le nom.

Ex : **Ar gêr-mañ.** *Cette ville (-ci).*
Ar gêr-se. *Cette ville (-là)*
Ar gêr-hont. *Cette ville là-bas.*

Notez que ces particules correspondent en fait aux 3 adverbes *amañ (ici)* marquant la proximité, *aze (là)* marquant l'éloignement et *ahont (là-bas)* marquant un plus grand éloignement encore.

5 - AR GER-MELL/L'ARTICLE

L'article défini se combine avec la préposition *e* pour donner les formes contractées suivantes :

e + an = en dans *le, la, les* et aussi *à, au, aux*
e + al = el
e + ar = er

Ex : **Er sirk emañ.** *Il est au cirque (littéralement dans le cirque).*
Er skol emañ. *Il est à l'école (littéralement dans l'école).*
Er gibell emañ. *Il est dans la baignoire.*
En oferenn emañ. *Il est à la messe.*

Notez que lorsque l'on voudra insister sur le fait d'être à l'intérieur on emploiera plutôt **e-barzh** au lieu de **e**.

E-barzh ne se combine pas avec l'article.

Ex : **E-barzh an tren emañ.** *Il est dans le train (à l'intérieur).*
E-barzh ar skol emañ. *Il est dans l'école (à l'intérieur des bâtiments de l'école).*

6 - AN ARAOGENN DIOUZH/LA PREPOSITION DIOUZH

Diouzh marque l'éloignement, la séparation.

Ex : **N'emañ ket pell Enez-Vazh diouzh ar gêr-se.**
L'île de Batz n'est pas loin de cette ville-là.